



# DISPUT ETRE MOLARJES AGAR G'HORAIIS.

---

MOLARJES.

**M**E a garre gout, Coraïs du,  
Da beleac'h e zès-te gant da ludu?

AR G'HORAÏS.

Me a ya da ober couës,  
Da zilasteza Molarjes.  
Da faç a zo quer vil ha quer lous  
Ma zout envel eus eur marmous;  
Da fri a zo rus ha bronduet  
Evel eur pesquic moguedet;  
Da zaoulagat a dro en da ben;  
Da vleo a velan quen disquempen;  
Da zillat a zo leun a lastez:  
Anvet mat out bet Molarjes!  
Eur c'houës cren a renquier sur  
Da ober dide chench a figur.

MOLARJES.

N'en deus nemedout-te, Coraïs fal,  
A deu d'am blam ha d'am zamal:  
Quement am guël, pa deuan er vro,  
Am receo tout, ha mal ganto.

N'en deus na rost na pasteziou,  
 Nac anduillen na chambonou,  
 Na bevin leue na quic maout  
 Na preparer, pa aller caout;  
 Na cabonet nac ouïdi,  
 Quefeleguet na clujiri;  
 Mar caver guin mad ebars er vro,  
 Ha pa goustfe quer, querc'het e vo  
 Da ober fest da Volarjes:  
 Ha pa rancfet soufr goude paourentes,  
 N'en deus na paour na pinvidic  
 Na brepáront quic pe zilzie,  
 Ha na renquont caout boutaillat,  
 Ha pa ranquent guenza dillat,  
 Da ober fest da Volarjes.  
 Mes te, Coraïs ques, ne c'heus na mignon  
     na mignones.

Quen didrues e zout oute  
 Ma lames o bues digante,  
 Ma spontont ha ma zebulantont,  
 O clevet coms demeus ac'hanout:  
 O laza a res gand da yunion  
 Ha disec'ha o oll memprou.

### AR C'HORAÏS.

N'en de quet ar yun en deus ar brud  
 Da ziverra bues an dut;  
 Er c'hontrol eo an excessou  
 A zo goas cals d'ar c'hlenvejou!  
 Te a c'heus lazet meur a ini  
 Gant gourmandis ha mesventi;

Te a lam digante o squiant,  
 O reson hac o jujamant,  
 Hac o laqua da alteri,  
 Goude antren e furnezi,  
 Hac o lezo var ar pave  
 Goude o zreti evel-ze.

Ne ouzon quet penos e chommont beo  
 Goude ar pes a res-te deo.  
 Un deves a zebauch a ves gret  
 A gustum da vea control d'ar yec'het  
 Mui evit ar C'horaïs,  
 Ha pa batfe tri na pevar mis.

## MOLARJES.

Tao, Coraïs; un diout out.  
 Ar vedecinet a gle gout  
 Petra so mat doc'h n'en de quet  
 Da gonservi ar yec'het;  
 Ar vedecinet, gouscoude,  
 Cals anezo a ev guin ive,  
 Hac efa caër, pa roer dezo,  
 Bete memes coeza mezo.

## AR C'HORAÏS.

Me a oar erfat e rentet dall  
 Medecinet couls ha re-all.  
 N'en deus nicun anezo ne ouzont erfat  
 Petra so mat doc'h n'en de quet  
 Da gonservi ar yec'het:  
 Cals a re-all a bareont  
 Hac o-unan en em lazont.

## MOLARJES.

N'en deo quet ret en em laza  
 Evit na debri nac efa :  
 Me n'em beus quet a c'hoant e varfe den;  
 Me garre o guelet tout laouen.

## AR C'HORAÏS.

Eh bien, guir eo; pa zeont eus da dol,  
 Laouen hac adal e vezont oll.  
 Perac? En imor vad o lequeer  
 Gand ar cher vad a breparger;  
 Mes, Molarjes, un traïtour out:  
 Abars ma zeont en o rout,  
 E lequeer cals demeus anezo  
 Da chench imor, pa vezont mezo,  
 Ha da ober mil follentes  
 Goude da laouenedigues.

## MOLARJES.

Pe seurt follentes a reont-i?  
 Lavar dime ta, mar greont-i?

## AR C'HORAÏS.

Pe seurt maleur ne erru quet  
 Oc'h da heul-te, tra milliguet?...  
 Coll an enor, coll ar madou;  
 Col ar vues gant corfadou?  
 Ha bet goas hac a bet maouës  
 En em dizenor assambles?  
 Hac enorabl eo d'ar merc'het  
 Quemeret habijou goaset;

Laquat masclou var o bizach  
 Evit redec gant tud volach?...  
 Hac enorabl eo d'ar voazet  
 Quemeret habijou merc'het  
 Evit mont etouez ar gragues  
 Da ober mil fallagries?  
 A bet emgan, a bet querel!  
 Hac a bet den a renq mervel  
 Divar da ben-de, Molarjes,  
 Goude da laouenedigues!....  
 C'hoas, a bet den, divar ar guin,  
 Er c'hoariou en em revin  
 Hac a gol en un nosves  
 Mui ma na c'honezont en eur blaves!  
 Nac a bet mallos a roer dide  
 Gand ar chagrin a ves goude?.....

### MOLARJES.

Oh! me à ra goab deus ar maloziou  
 Hac em bes goal bedennou!  
 Derc'hel tinel eo va etat  
 D'an nep a gar ober cher vad,  
 An nep en deus hoant da vont deus va zol,  
 D'an nep a gar a zo friol;  
 Mes te, Coraïs, a zo un insolant  
 Dont d'am choqui injustamant,  
 Ha ne ouzot te quet, en eur guer,  
 Deus piou e c'heus affe;  
 Car me a zo savet a lignes vad,  
 Quen abers mam, quen abers tad.

## AR C'HORAÏS.

Deus a beleac'h, tra affrontet,  
E zonch dide e zout savet?

## MALARJES.

Me a so savet a lignes Noë  
A voa mignon bras da Zouë.

## AR C'HORAÏS.

Guir eo Noë a efas guin  
Mæs ne vouie quet e voa malin.  
Da vesvi an dut evel ma ree  
Biscoas banne ne efas re,  
Na biscoas demeus e lignes  
N'en deus bet den anvet Molarjes.  
Deus an ifern e zout savet;  
Satan en deus da enjandret  
Ha da digasset var an douar  
Da veza cos da vil glac'har,  
Da vil emgan, da vil malheur  
A ques var an nep a ya da c'heul!....  
Eur fripon oût, hac evel-ze  
Me am beus urs a beurs Doue  
Da ober dit quittaat ar vro  
A teac'h prest, pe me da foeltro!....

## MALARJES.

Pardon, pardon, va C'horaïs!  
N'en em laquit quet e malic,  
Ha, mar plich ganeoc'h, o pet truez  
Un neubet c'hoas oc'h Molarjes;

Ha mar quirit entent reson,  
 Me am beus esper da gaout pardon.  
 Me a rayo eur gonfession general,  
 Fidel ha leal. Guir eo gueach-all  
 E zon bet cos,  
 Quercouls en deis evel en nos,  
 Da ober cals a zispignou  
 Gant cheriou mad ha c'hoariou :  
 Mes, aboue pell a zo,  
 An traou tout a zo maro ;  
 Ne veler mui, da Volarjes,  
 Nemeur a vin, na rost, na pastez ;  
 Parconsequant ar c'hoariou  
 A so et tout ervers abiou.  
 Perac ta, Coraïs quez,  
 E c'hourdrouzes-te Molarjes ?  
 Pa na ra drouc ebet mui  
 E zout oblijet d'e bardoni :  
 An nep a govessa e bec'het  
 A virit beza pardonet.

### AR C'HORAÏS.

Da gonfession-te, Molarjes,  
 N'en de nemet affronterez.  
 Ma na ret quet breman quement a voal  
 Evel a c'heus gret gueach-all,  
 E maout en dessing da ober,  
 Peneverte ar guin a so quer :  
 An taillou so bras hac ar guernes.  
 Just a ra da dristidigues.  
 Potret a c'heus hac a lequees c'hoas

Da ober cher vad couls a biscoas :  
 Rac ze, coquin , ha te a gleo ,  
 En em den prest ermez ar vro  
**H**a ne rezon quet davantach ,  
**P**e me foeltro var da vizach !....

## MOLARJES.

**V**à mignonet , tostaït aman :  
**R**et e mont quit , var a velan !  
**E**t e zeo ar C'horais ac'han eun tu.  
**M**e gont e ect da guerc'hat ludu ,  
**E**zonjeal va ampoezoni ;  
**M**es en em drompla a raï.  
**A**llas ! breman , va bugale ,  
**C**'houi a gavo un neubet quer se !  
**A**r C'horais a rayo deoc'h  
 Ober gual cher a nespet deoc'h ;  
**M**es , da viana , deus ar mintin ,  
**C**ousquit da c'hortos o lein  
 Ha ne savit quet deus o quele  
**Q**uen a vo dec heur pe goude :  
 Neuze en eur gavo eur mignon  
 A brezanto collation .  
**E**un tam fourmach , eun tam bara  
**G**ant eur chopinat n'en deo netra ;  
**A**r c'his commun eo quemen-ze  
 Ha ne dor quet ar yun an dra-ze .  
**L**aquit ar bériou hac al landeriou  
 A ispil er chiminalou ,  
**E**vit miret ne verglint quet ,  
**E**vit ma cavet , pa vo ret .

Ar vessel hac al lingiri,  
 List ar C'horais d'o guelc'hi.  
 Couës a rayo gant e ludu  
 Evit o guelc'hi, mar bezont du:  
 Affer en devo anezo;  
 Rac se, mar car en o guelc'ho.  
 Ne nec'hit quet, va bugale;  
 Me deuyyo d'o quelet adarre,  
 D'o treti sur guel mar gallan  
 Evit n'em beus gret er blo-man:  
 An taillou a ziminuo  
 Hac ar bed oll a drafico.  
 C'hoarzin a rit, va bugale;  
 Mes ret e deport ar mare.  
 Erru an diaoul zont gant e ludu!...  
 Me a ya da dec'het eun tu  
 Evit n'em c'havo quet aman:  
 Adieu deoc'h a lavaran.  
 Pa vin me et er mez ar vro,  
 E sonjeo dean e vin-me maro;  
 Mes en dra pado quiguerez  
 Ne varvo biquen Molarjes!...  
 (*Molarjes a ya en e rout ;*  
*Merc'her al ludu a erru.*)  
 Bonjour, consortet Molarjes:  
 Emaoc'h oll e tristidiguez.  
 Et e o mest, var a velan,  
 Un tu benac eus ar vro-man;  
 Mes eleac'h guela da Volarjes  
 E clefac'h guela d'o folentez!...

Eur veach benac e tui Doue,  
 Hac a ben eur mis, marteze,  
 Da c'houlen diganeoc'h perac tra  
 Oc'h eus torret ar bromessa  
 O poa gret en o padiziant  
 Da renonç cren d'an ærouant.  
 An ærouant ha Molarjes  
 So o daou deus ar memes lignes;  
 Daou adversour int da Zoue  
 Hac a zisplich d'e vajeste.  
 Ho Toue o c'heus gret anean  
 Queit a ma ze bet ebars er vro-man:  
 Oc'h ilizou, d'e adori,  
 N'en de bet nemet hostaliri  
 Ha quement ti oc'h eus hentet  
 Evit bea doc'h ar banquet;  
 Eur banne guin guen a serviche  
 Da zour biniguet, en antre;  
autre Evit antren, da celebri,  
 An dol a vije e creis an ty;  
 Evit matier a offeren,  
 Eur voutaillat hac eur veren:  
 Choazet o poa vit fabriquet  
 Mest an ty hac ar botret;  
 Evit ezanç da ezanci,  
 Querniel butun da vutuni;  
 Evit action a c'hraçou,  
 Jestou lubric pe disputou;  
 Evit zarmoner da zarmon,  
 Un impudic pe eur bouffon.

Da lavaret bavardiach.  
 Evit c'hoarsin da Volarjes,  
 Petra oc'h eus-hu gonezet?  
 Dispign oc'h arc'hant oc'h eus gret  
 Evit livra oc'h eneou  
 Da Lucifer, dre o crimou!...  
 Me a vel breman deus o pizach  
 Oc'h eus regret d'o tiotach.  
 Guelit breman d'o sollentez  
 Hac eur veach-all laquit evez;  
 Hac evit caout remission,  
 Grit da Zoue satisfaction.  
 Requis eo, da Volarjes,  
 Tri pe pevar repas bemdez:  
 Er C'horais a po pe poan;  
 Ne rit james nemet unan.  
 Gret oc'h eus crimou isolant;  
 Confessait ta humblamant  
 Ha choasit eur C'confessour  
 Ha na vo quet doc'h o humor  
 Na doc'h ini Molarje;  
 Tollit eves oc'h ar seurt se.  
 Confessoret so, marteze,  
 O deus gret diotach ive,  
 O deus gret, quercouls ha c'hui,  
 Da Volarjes, bete mesvi:  
 Na dostait james deus ar sort-ze  
 Da glasq absolven doc'h ene.  
 Ma na ellit absolument  
 Yun ar C'horais antieramant;

Choasit eur C'honfessour santel  
 Hac a vouezo mat e guentel:  
 Interrojit-an var o tever,  
 Petra a so mat da ober  
 Evit tremen ar C'horais  
 Eves intantion an Ilis.

Beza e zeus Caziustet *Casuistēs*  
 Pere ne dint quet approuvet,

Jesus, map Doue crouer ar bed.

E zeo mest an ol Caziustet

Hac a lavar e zeus daou hent,

Unan ledan hac unan enq:

Dre an hent enq e renquomp oll

Bale partout, ep mont da goll.

Baleomp eta dre an hent moan,

Lezomp gant ar re-all an ledan;

Ne c'houleñnomp dispanç na grāç ]

Anes na ve necesser bras.

FIN.

Il Imprimet var ar scrit-dorn, II  
 E TY Vor GUILMER, IMPRIMER-LIBRER, E MONTROULEZ,  
 guech-all plac ar pesqet,  
 breman, ru a Aiguillon, taust da blacen Audiern,  
 hac e traon ru St. Malani.